

# CANTIC SPIRITUEL

Salver ar bed universel,  
Roit din ho craç hac hò siem.

EN ENOR

## DA SANT IAN BADEZOUR

Var un ton nevez.

Jesus, Map d'an Tad Eternel,

Salver ar bed universel,  
Roit din ho craç hac hò siem  
Da goms a sant Ian Badezour.

Zachari hac Elizabeth,

Voa e dat hac e vam hanvet,  
D'an den voant exant a hep'blam  
Pa voant da sant Iao tad ha main.

Elizabeth a voa coz bras,

Hep beza bet buguel biscoas,  
Mæs dre ur c'hraç dréist an Tatus  
E concevas he c'hrenadur.

E goir priedou e vevent,  
Humbi voant ha parfet Evel sent,  
Bemde e suplient Doue  
Ma roje dese bugale.

Pa voa Zachari en Iis  
O offr da Zoue ar sacrific,  
E tigaças Doue an Tat  
Un Ael dezan gapt quelon mat.

Ebars en tu deou d'an ander,

E tisquennas ar messenger,  
Hac e taras da Zachari,  
Ema graç Doue en ho ty,

Exaucet eo bet dec'h ho peden,  
Doue a ro deoc'h ha conten,  
Ho priet, quent nemear aban,  
En devo ur map hanvet kip,

Ar map-ze a vo ur sant bras,

Ur precurseur d'af Messias :  
Ar c'hraç en devo da velet,  
Nep a dle redimat ar bet.

Gabriel a zisparissas,

Elizabeth a gonocevas  
Ur map etre e daou goste,  
Precurseur d'an Autrou Doue.

Pa voa santez Elizabeth

O touguen sant Ian biniguet,  
E teuas ar Verches Vari  
Evit renta bisit deze,

Mari a zongue d'ar chouls-ze

En e entraillou Map Doue :  
Deut voa abers ar Speret-Glan,  
Da lemel ar pec'her a boan.

P'en devoa Mari saludet

He c'hiniter Elizabeth,  
Ha discuet dezi ur joa bras  
Daon miracl caer a c'hoarvezas.

Sant Ian e cof Elisabeth,

Gant joa a commancañ tamet  
Evel pa vise d'an daoulin  
Da saludi he Vestr divin.

Ouspen e voa sanctifiet,  
Delivret demeus ar pec'het,  
A ro deomp hon tad hac hor mam,  
Balamour d'ar pec'het Adam.

Piou ne gompreno quel a han  
An excellanç eus a sant Ian,  
Grêt voa gant Doue ur sant bras,  
Hac en ne voa quet ganet c'hoas.

Pebez joa da Elizabeth ;  
Pa c'hanas he map biniguet :  
Cavet Jesus en e c'hichen,  
Redempteur an natur humen.

N'em eus nep douet evit avanc,  
E voa en Ev rejouissanc,  
Hac e cane an oll Alez  
Da sant lant, cantieou nevez.

Pa zeo Jesus Roué a c'hoar  
Deut eus an Ev var an douar,  
A zisquene dre e bresanc  
Cals demeus a rejouissanc.

Zachri a voa mut rentet  
Balamour m'en devoa douet  
Da gomzou an Ael Gabriel  
Messager an Tad Eternel.

Mæs sant Ian pa zeo bet ganet  
Ar goms d'e dat en deveus roet :  
Rac chetu aman e gomzou  
Ian emezan eo e hano.

Entre ar bugale malet  
So biscoas gant groaguez ganet  
N'en deus quet bet hepquer unan,  
Brassoc'h evit ma zeo sant Ian.

Jesus-Christ pa voa var ar bet  
Eo en deveus e lavaret,  
Me gred, ho Salver pa gomzo  
Avezo credet hep testo.

Sant Ian biscoas ne'reas pec'het,  
Ha ras pinigen bras hépret ;  
Paourente, poan, homilite,  
N'en deus bet quen en e vube.

N'en devoa quen evit dillat  
Nemet croc'hennic eun danyat  
E diliciussa cheriou  
Voa dour scler ha griziou lousou.

E vele voa an douar yen,  
E dy er meas, e bluec men,  
E dapis hac e lincellou  
Ne voant nemet spoe ha dellou.

E compagañez al loenet,  
Bleizi, Moc'h guez ha Leonet,  
E jardinou d'en em bouremen,  
Coajou, drez, spern, dour a douillen.

Concluomp eta, christinien;  
Eo necesser bras ar binigent,  
Pa zeo un den quen innocent  
A souffr quement-all a dourmant.

Sant Ian en desert er guis-ze  
Ne re nemet pidi Doue.  
Ha gortos gant un désir bras  
D'enediguez ar Messias.

Mæs pa voa arru **tan termen**,  
Da brena an natur humen,  
E quittas sant Ian ar c'hoisjou  
Evit mont da sermon dre'r vro.

Da laret dan **dut disordeen**,  
E voa ret ober pinigen,  
Evit prepari an henchou  
Da ziguemerec an Autrou.

Ar bret mat demeus e yuhe,  
E squiant e autorite,  
Ar re d'an dut a bep cantou  
Donet d'e glevet o sarmon.

E sellon a voa quer charmant,  
Quen douç e goms, quen ravissant,  
Ma songent oll bien ha bras  
Penaus voa en ar Messias.

Bete memes ar Jusevien  
A zeputas o beleyen,  
Evit mont da c'houlen ountan  
Hac ar c'christen a ret quezan ?

Mæs en en deveus **respoalte**,  
Ne voa na Christ, mac ar Prophet,  
Nemet ur vouez en ur dremen  
O laret ober pinigen.

Sant Ian eleac'h ma tremende,  
Ouspen sarmon e vadeze;  
Gant e goinzou e yeat contant  
Da seuch a caout badiziant,

Pa voa o sarmon ere **Herod**,  
E quichen bord rivier Jourdren,  
E teus Jesus e uan  
Da veza badezel, gant Ian.

Sant Ian en istant meuguelas  
Ous e anaout en discipesas,  
Heman, emézan, eo an oan  
A lammo ar pec'her a boan.

En zo bet deomp **prometet**,  
Gant quement eus a Prophedet;  
Chetu aman an oan Doue :  
Hor Maestr, hor Chrouer, hor Roue.

Piou a gomptenas biscoas  
Hemifite ar Messias,  
Pa bligeas gantan er Jourdren,  
Monet e renq ar bec'herien.

Da effaci ar pec'bejou  
E ve gret ar badlanchou,  
Mas Jesus, hac en innocent,  
A recevas ar badiziant.

Chetu aman traou surprenant  
Hac a ra din coll ar parlant,  
Guelet Jesus hamillet  
Dirac nep en devoa crouet.

Jesus hor Maestr, Roue a c'hoear,  
A so prostereroet d'an douar;  
Mæs Ian o rei ar badiziant,  
So enoret eyleur **sant**.

Jesus a so **voar e zaoulin**,  
Hac en ur personach Divin,  
Jesus a so e plaq ar pec'her,  
Ha Ian so e plaq hor **Salver**.

Choi sant Ian p'ho poë an **enor**,  
Da badein hon Redemptor,  
A remarquas a c'uc'bje bean,  
At Speret-Santel o **tisquenn**.

Chui glevas an Tad Eternel,  
O ansao eno e Voguel ;  
Henuez eo m'a Map, emézan,  
Ma fliegeadur a so ennâne.

Sant Ian p'en devoa **badezel**,  
Jesus hor Salver banniguer,  
A vas da balzes **Herodes**,  
D'e vlam eus e aoultriea.

Mæs ar roue Herodias,  
Ous sant Ian en em goleras,  
Hac a ras dre spasion  
Lacat anezan er prison.

Pa voa ar roue un **devez**,  
O leina e compagnañez,  
E teus merc'h ar plæch flamant,  
Da ober un dans dirazan.

Ar Roue neuse a laras  
D'ar Verc'h-ze da Herodias,  
Goulen un dra benac oustapeng a stadevili  
Hac e di vize anezan.

Gant he mam ar plæch'li queleñnet  
Penn Sant Ian e deus goaleñnet ;  
Troc'het vœc er prison e beno,  
Ha roet dezi he goleñ.

Sant Ian breman ez o'ch er gloar  
Gonde ho poau var un douar :  
Hoc'h assistanç a c'houlenñemp,  
Ho pezet sonch eus a c'haomp.

Hor preservit ous teir goaleñ,  
Bresel, quernez hac ar vocen,  
Dre ho pedennou deiz ha nos  
Hor c'houduet d'ar Barados.